


Kantik

INTRON VARIA TI MAMM DOUE

VAR DON : *Patronez dous ar Folgoat.*

DISKAN :

*Guerc'hez Vari, Mamm Doue
Ha Mamm ar gristenien,
Sellit ouz ho pugale
Ha klevit hor pedenn ;
Diredet omp d'ho chapel
Gant ar vrasa fizianz
Da gaout eus ho torn zantel
Ar gaerra rekompanz.*



I

Abaoue meur a gantved
Aman 'hars ho skeuden,
E teu kalz a Vretoned
Da ginnig o fedenn,
D'hon tro varlerc'h hon tud koz
Ni deu d'ho saludi,
Da gana d'eoc'h mil bennoz
Ha gant feiz d'ho pedi.

II

Pa deuas an Tad Maner
Er vro-man da brezeg,
C'houi 'zeskas, e berr amzer,
D'ezan ar brezoneg :
Roit ive d'hor bugale
Eun teod distagellet
'Vit difen start hon Doue
E yez ar Vretoned.

III

'Vit ar yugale gristen
 N'eus ket brasoc'h dudi
 Eget echars ho skeuden
 Daoulina d'ho pedi :
 Oh ! difennit hep dale
 Eneb an dul diroll,
 Feiz kristen hor bugale
 Pe e yelo da goll.

IV

Tud yaouank hor pârreziou
 Da zevez ho pardon,
 Evit kaout ho vertuziou
 Ho ped a greiz kalon :
 Roit d'ezo gant largentez,
 'Vit kreski o gened,
 Feiz, Esperanz, Karantez
 Nerz, dousder ha glanded.

V

Araok pourchas eur c'havel
 Ha farda mailhurou
 Ar vamm a deu d'ho chapel
 D'ober he fedennou :
 Varni, ervez he mennoz
 Guerc'hez, Mamm de Jezus,
 Skuillit sikour ha bennoz
 'Vit an heuriou poanius.

VI

Aman, pa ziroll brezel,
 Ar gragez er goelvan
 A deu da c'houlou skoazel
 'Vit o zud en emgann :
 Er brezel great d'an Iliz
 Gant tud fall ha direiz
 Sikourit ato Breiziz
 Da jom fidel d'o feiz.

VII

Aman c'hoaz meur a bec'her
 Bruznet o c'halon
 Digant ho Mab o barner
 O deus bet ar pardon :
 O Mamm, bezit truezus
 Ouzomp-ni ec'herien,
 Evidomp digant Jezuz
 Bezit an absolven.

VIII

Ar c'hlanvour o klask yec'hed,
 Pa ne gont var an dud,
 Warnoc'h a zav e spered
 Da c'houlou eur burzud ;
 O Mari, Mamm a druez
 Ha Mamm an dud en doan,
 Diskouezet ho madelez
 En eur derri o foan.

IX

An den en e dremenvan
 Pa vel eo red mervel,
 D'e zifen eneb Satan
 A glask c'hoaz ho kervel :
 Grit d'ezhan kaout ar viktor
 Eneb an drouk-spered ;
 Evit ma kavo digor
 Palez kaer an Drinded.

X

Ni'bromet beza fidel
 Betek pred ar maro
 Da zont bep bloaz d'ho chapel
 'Vit meuli hoc'h hano :
 Neuze, grit, o Rouanez,
 Gant Jezus hor Roue,
 Ma vezimp holl eun devez
 Kurunet e Doue.

N. B. — *Ar Pardon braz a vez great d'ar zul kenta a viz Gouere.*

Epad eizvet ar Pardon hag bep gwener epad ar C'horaitz, ez eus induljans plerier da c'hounit, war bouez kovez ha kommunia.

Epad ar C'horaitz, gousperou bep sul er chapel.

Imprimatur :

Quimper, le 10 Décembre 1926.

P. MESSEGER, vic. gén.